

(389, suite)

Exempl eus a eun Den a Jugon,
Pehini a voerzas e Jubile.

Var ton Sant Herve.

Me ho suppli oll, Bretonet,
Tostait amañ da glêvet
Eun exempl nevez êruet
Da Volarges, ma c'hententet.

(390) Hoquen, allas! petra ouñ-me,
Hep caout sicour demeus an êe?
Va speret a zo imparfet,
Ha va memor a zo troublet.

Quere'hez divin hac adorabl,
Bezit em andret favorabl;
Roit din graçou necesser
Da burlia da Kreizis ger.

Clêvit petra zo eruet
Gant tri libertin diremet,
Eñ hostaliri oc'h eva,
Deiziou Molarges direa-

Eun exempl a zo pitoyabl,
Ha da bep-unan profitapl
Da dec'hel diouz an debochou,
Zo caus da galz a valeurion.

Mesfier infam hac obstinet,
Tosta amañ erit clêvet:
Petra res bars en ta'vernion?
Coll da ene ha da vadou.

(391) Eus a greiz ma voant oc'h eva,

Pa voant commencet da domma,
E comfijot eus ar Jubile
A voa gante en o c'houbre.

Berza voa unan aneze
Eñ devoa grêt e Jubile;
An drouc all a voa appellet
D'ur mis gant o c'hovessoret.

Ar barbar en em bompade
Da vea grêt e Jubile,
Hac e voa contant d'e voerza
Erit caout arc'hant da eva.

Unan eus e gamaradet
Digantân en deus goulennet:
Pequeument a gousto din-me
Caout digant da Jubile?

An tirant en deus respontet,
Toiullet gant an drouc-speret:
Ugent real, d'an nebeuta,
M'am berzo arc'hant da eva.

(392) Ne dal get gementse din-me:
Ur scoët eo pris ar Jubile;
Mar geres e rei din bremâ,
Bremen ni a ya d'ev eva.

Judas a voerzas hor Zalver
Ar pris eus a d'riégont diner;

322

Emân a voerz e Jubile,
Evit ur seot coll e ene !

Doùe a zo oll-buisant
A c'hortos ar pec'her mechant :
Oc'h traon, er c'haos pa zisgeannas,
Pemp diaoul a apparissas.

Trouez ar re-ma voa unan
Hac a gomzas outân buan :
Mar ec'h eus c'hoant da zemezi,
Me a gavo did eur parti.

Apparissa a ras deân
Evel eur femelen gaerân,
O sonjal gallout e denti,
Hac er c'his-se e zessevi.

Cetu en terrubl estonet,
O c'hervel e gamaradet : (393)
Me zo ambarasset amân ;
N'ouy doare petra ar re-mân.

Unan deân a lavaras :

En han' Doue, gra sin ar groas ;
Goulen pardon eus da bec'het,
Eus ar c'krim ac'h eus coumettet.

Cetu en oc'h en em groasia,
An diaoul o tisparissa ;
Ma yeas da dy ar c'hure,
Da rêi arc'hant e Jubile.

Ar c'hure deân a lavaras :
Grêt oc'h eus certen eur faut bras.
Penos ? gwerza ho Jubile,
D'abuzi a c'kraçou Doue !

Obliget bras oc'h d'ar Verc'hez,
Rac-se pedit-hi alies ;
Dalc'hit memor en ho calon
Poanniou Jesus er Bassion.

Emân zo 'n exempl, christemien,
Da dec'hel eus ar mevrerien,
Heullit atao an dud devot, (394)
Ha d'ar Barados e zelot.

(Vol. VII, p. 389-394.)
strophes non numérotées.